

Gwerz neve savet gant eur zoudard

eus an 248^{vet} rejimant

Diwar-benn ar brezel

191

Trinded santel adorabl, roët d'in sklêrijen,
'Vit ma c'hallin disklêria ar walen penn-da-benn...
Houman 'zo eur blaneden, eur walen a gasti,
Seurt biskoaz war an douar ne voe gvelet hini.

An de kentan a viz Est, breman ez eus tri bloaz,
'Voe embannet ar c'helou gant ar c'hloc'h e son
[gloaz ;
En-dro da bemp eur hanter stagas ar c'hloc'h da
[zon
'Vit embann an taol mantrus : « ar mobilization » !

Me 'n em gave d'ar c'houlz-se er park o trou-
[c'han ed ;
Kenkent ma sonas ar c'hloc'h 'voe nec'he' ma
[spered.
Ganin 'oa o labourat tud all, devezourien ;
Holl hon eus laret 'n eur vouez : « Brezel, a dra
[serten !

An trivet devez goude 'oamp galvet da Wengamp
'Vit dont da gemer eno hon renk er rejimant ;
Kent kuitaat c'h'on bet o welet tud ma bro,
An neb dreist-oll evel don 'dlee mont en e dro.

Kenavo, ma holl gerent ! Ho kuitât a zo red. ...
'Benn pegouls e vin distro ? Ze n'hellomp ket
[laret !
Met, pa renkomp kimiañ, demp holl a galon vat.
Ha rentomp enor d'ar Zent ha da Zoue, an Tad.

A-rôk kuitât Louargat eun dro 'barz an iliz !
Itron Varia ma farroz, miret mat ho Preiziz !
Roët d'imp nerz ha kalon dirak ar Brusianed,
Ha, mar deuan war ma c'hiz, me n'hoc'h ankouañ
[ket. »

Ha setu me aet en hent gant ma c'hamarado,
En eur laret : « Kenavo ! kenavo, Breiz ma bro ! »
Houman a vo evidomp eur dro-berc'herinach...
Pa vo gonezet an Tre'h e vo fin d'hon beach.

Pa oamp erru en Gw ngamp ne welet tro-war-
[dro
Nemet soudarded a Vreiz 'vont da zifenn ar vro ;
'Barz ar c'hazarn Tour-d'Auvergn ni a zo bet
[gwisket.
Hag omp chomet pemp devez 'rôk bezan embar
[ket.

An navet de a viz Est 'voemp partiet deus kêr
Hag, epad ma oamp en tien, 'oamp joaüs ha
[seder ;
Dre Evreux, Pariz, Soissons ha Reims 'omp
[tremenet ;
E-barz en kêr a Rethel deus tren omp diskennet.

War-zu harzou ar Veljig ec'h omp aet ac'hane,
Eur zav'n pounner war hon chouk o kerzet 'hed
[an de ;
'Benn 'm boa graet pevar « etap » e klevis kano
[liou
Gant ar Veljed kalonek o tifenn o gwirioù

An tri war-ugent a Est 'oa an de-se bep-mar...
Gant strons ar c'hanoliou bras e krene an douar !
A-benn nav eur eus an noz 'oamp erru da zikour ;
En Montjumont, da gentan, 'kavjomp an ebour.

War-dro deg eur eus an noz 'stagjomp gant ar
[c'hrogad ;
Houarn a goueze 'n hon mesk evel glao a gaouad ;
Yudal 'rê ar boulejou en hon mesk-ni, Breiziz...
Eno meur a genvroad o kouezan a welis.

Siouaz ! ne oamp ket a nerz ouz an Alamaned,
Ha red mat e voe kila ha monet en « retred » ;
Ac'hane e renkjomp mont hag a-hed hag a-dreuz,
Ha 'benn ar fin 'voemp laket da zifenn stêr ar
« Meuz ».

E-pad daou de da diou noz eun emgann ar
[gwasan
A voe soutenet ganimp, er « Meuz », 'kichen
[Sedan ;
Neuze e voe kemennet kuitât prim an dachen!...
Ma vijemp chomet pelloc'h e oamp prizonerien.

Setu eta ar Boch kri mestr da dremen ar « Meuz »,
Gwir ziaoul eus an ifern, d'ober dre-oll e reuz,
Pa na ra, dre ma tremen, nemet tana kêriou,
Gwaska ar paour kêz broiz, o lac'han a-wechou.

Da « Dourteron », goude-ze, e voemp-ni kaset
[holl ;
'Benn pemp eur, an de war-lerc'h, e klevis ar
[c'hanol ;
Diwar lein ar menezioù ar Voched a loske
O boulejou warnomp-ni taget a zaou goste.

Sonj am bo eus an de-se, 'voe kollus evidomp :
Koll tost da bevar-c'hant den, en dro-ze, a
[renkjomp ;
Gwall-flastret omp bet eno gant nerz ar c'hano-
[liou
Pa n'hellemp e neb doare diwall diouz o zaoliou.

Red 'voe d'imp donet war-drenv ha kerzet de ha
[noz
Hep kaout amzer da zibri na zoken da repoz ;
War an hent, a vandennou, e welemp 'bep mare
Tud o tec'het rak an tan 'vit miret o buhe.

Betek e-kreiz bro an « Aude » kila hon eus
[renket ;
Eno an Alamaned harz da vat 'deus kavet ;
'Benn neuze hon c'hanoliou 'oa 'n o roll en tal-
[ben
Hag, e lec'h kila ha koll, gonit ne rejomp ken !

Ar c'houec'h a viz gwengolo e voe eun emgann
[vras
En « Camp Mailly » hag er « Somme » hag er
[« Fere Champenoise » ;
Hounnez 'voe er gann ar « Marne » he deus d'imp
[gonezet
Brud-vat war Levr an Istor en Amzer-da-zonet.

Kouezan 'raent evel kelien e-kreiz ar plênennou,
Pe o klask en em guzat evel tern er c'hoajou ;
Ne vern d'ar Boch pelec'h mont, 'kave tomm ar
[zouben
Red d'han paeen e dorfed diwar goust e 'groc'hen'.

Ouspenn daou-ugent mil den d'eze 'voe diskaret
En emgann vrudet ar « Marn », 'tre lazet ha
[glozet ;
Ret 'voe d'ê dont war o c'hiz.... Ha ni war o
[zeuliou !
Ha tan d'ê war ar blênen kouls hag en o foziou !

Pevar-ugent kilometr ar Boch 'renkas kila,
Met nepred ne vank ijin d'e spered ar falla :
Kleuziet en deus toullou don evel ma ra ar
[broc'h,
D'en em guzat en douar pa n'helle mont pelloc'h.

Setu red d'imp chom a-zav, ha ni leun a foug...
Al « louz » a ra goap ouzimp, kuzet 'n e doull
[neve ;
Nemet gant ar c'hanol bras n'heller e zistruji,
Met, pa deu war ar blélen, e tap start war e fri.

Setu ni 'ta daou vloaz 'zo 'barz hon foziou-difenn,
Hep ma c'hellfemp goût pegouls 'vo fin d'an
[abaden.....
E-kichen da Zant-Hiler 'voemp la'et da balat
Da gaout evidomp ivez kledouriou kempenn-mat.

Ac'hane, setu omp aet d'eur vilin war eur stér,
E-lec'h e voemp sioul a-walc'h e-pad daou viz
[hanter,
Nemet e dibenn miz Du e oa bet gwall-grogad,
Hag, evit ar wech kentan, 'voen gloazet en argad.

Neuze ec'h oun bet kaset d'eur c'hlanvdi e Chalons
Ha, goude-ze, er C'hreiste, er gêr a Gargason
Eno, a-benn eur mizvez, ec'h oun bet paret
Ha gant eur « permission » dont d'ar gêr 'meus
[gallet.

Laouen-bras e oan o vont d'ar gêr d'ober eun dro,
Da welet ma c'herent kêr ha ma c'hamarado,
Hag ive da adkavout ma mignonez fidel
'Vijen unanet ganti panevet ar brezel.

Goude-ze e voen kaset adarre da Wengamp
E-lec'h m'en em gav bepred « dépôt » ma rej-
[mant ;
Pa oan erru er c'hazarn, ar vizit tremenet,
E voen kavet mat raktal da vonet d'ar Voched.

Hag an eiz a viz c'houevrer, akipet a-neve,
E voen ambarket da vont en hent a-benn daou de ;
A-benn daou devez beajen « Suippes » e oan distro.
Kavet 'meus ma rejimant a oa bepred er vro.

Eno, an dek a viz meur, gant ar vaionetez.
E oa aet ar Fransizien e-barz « koad ar Volez »,
Nemet bec'h a oa kenan o klask treuzi da vad
Gant an orjal gourzreinek a oa tro-dro d'ar
[c'hoad.

Kollus, siouaz, ec'h eo bet an taol d'hon rejimant,
P'hon eus e-kreiz ar c'hrogad kollet eur c'hom-
[mandant.....
Moarvat e vo aotreet d'in laret e hano :
Penn ar c'houec'hvet bataillon, ar c'hommandant
[Jubo.

En eur gerzet en hon penn 'kavas eur maro kaer .
Eun den mat 'oa anezan. Enor d'hon ofiser !
Gras d'ezan da vont d'an Nenv gant hon c'hamarado
A zo kouezet evellan en eur zifenn ar vro !

Goude, hon eus chenchet plas da vonet en 'tu deo
'Lec'h e voe paket ganimp kalz a Voched en beo
E-barz eun dachen iskié, hanvet « intonoariou »,
Enni toullou bras-souezus gant an tennou-minieu.

E pad eun nebeut miziu e oamp chomet eno
Da c'hortoz ober asailh en dibenn gweugolo ;
Tri devez a-raok, ne oa 'met trouz-kuran da drailh
Noz-de, gant ar c't anoliou o kreinchat ar mindrailh.

Hag ar bempvet war-nugent setu omp dilammet
'Vit ober eua asailh bras e foziou ar Voched :
Al linen genta 'n eul lamm 'voe gonezet a diz,
Neuze e chomjomp a-zav da c'hortoz Marokiz.

En eil linen chom a-zav 'voe d'imp gourc'hemenet,
Da c'hortoz skoazell da vat gant ar Varokaned
A rae kelc'h dre an adrenv war an enebourien :
Eus ar re-man e voe graet kalz a brizonerien,

Engann-asailh ar Champagn e voe houman hanvet
Hag, ar wech-man adarre, ni hon eus gonezet ;
Nemet e vo red ober c'hoaz kalz a grogad
Vel hennez 'vit kas da vad ar Voched diouz hon bro.

Goude ober eun diskuiz 'voemp kaset war hon c'hiz
D'eul lec'h a rér anezan « Mereuri ar Markiz » :
Eno, an deiziou war-lerc'h e voemp-ni gwall-daget
Gant an ézennoù mougus losket gant ar Voched.

Eno, e-pad eiz miz leun, 'rejomp labour mat-tre
Ken 'voemp galvet da vonet da baouez en a-dré ..
An de a-raok gouel sant Yann setu-ni ambarket
Adarre ha da Verdun a brez omp bet kaset.

D'an tregont a vezeven asailhi hon eus graet
War lein krech'hien Thiaumont, eul lec'h gwall-
[g'envaet ;
Hennez eo, e gwirione, al lec'h an terupla
M'edon bet 'boue m'oun bemde er brezel o ruilha.

War ar c'hornsd-douar-ze Gwilhaou 'zo aheurtet
Gant ar c'hoant da dapout krog er pez n'en devo
[ket...
Nan, Verdun n'en devo ket ! Kaer en deus bern-
[war-vern
Kas soudarded d'ar maro, Gwilhaou, bouet an
[ifern !

Goude diskuizan eiz de, d'ar Champagn adarre
E voemp kaset 'vel a-raok da zerc'hel an « tran-
[che » ;
Eno neuze ar werz-man am eus-me bet savet
E-barz eun « toull-a-zelaou » e-kichen ar Voched.

An hini 'n deus graet ar werz nan eo ket eur
[« savant »,
Met 'barz ar brezel eman 'boue ar c'hommansa
[mant ;
Gras d'imp-ni digant Doue a vont da Vreiz-Izel
'Vit he c'hanan asazubles, pa 'vo fin d'ar brezel !

Ha ma teuan da gouezan war dachen an argad,
Ma ene a erbedan d'Itron Varia Louargat ;
Patronez ma farroz eo, man n'an dud enkrezet,
An neb a bed anezi ne vo ket dilezet.

Gant-se, pôtr d ma farroz, veldoun 'n em frealzet ;
Gant hou Patronez, hon Mamm, ni a vo diwallet !
Ha, pa vo fin d'ar brezel, d'ar walen a gastiz,
Ec'h c'fomp da Louargat, d'he fedi 'n hec'h
iliz.

Hag, 'vit peurachui, enor d'ar Vrestoned !
'Vit beza brezelourien n'eus par d'eze er bed ;
Hep dislegansi nikun, ouz den heb frouk-prezek,
Bev t hon Bro Breiz-Izel ! Bevet ar brezoneg !

F. GWAREGER.

